

Emgann Verdun: un emgann a ziskouez **ar feulster a- vil-vern***

Feulster a-vil-vern: feulster bras implijet àr ar soudarded hag ar siviled


Brezel an trañcheoù dre an oberenn Otto Dix (istor an arzoù)

Dielfenniñ an **teirzaolenn**(triptyque) « **Ar Brezel** » « *Der Krieg* » a **Otto Dix** hag ivez dielloù àr an emgann Verdun evit deskriviñ ha dielfenniñ brezel an trañcheoù èl **ur brezel hollek ha feulster a-vil-vern.**




Ar Brezel, Otto Dix
1929-1932
Teirzaolenn àr goad

Skeul an oberenn



« Ar Brezel » a Otto Dix eo an ul livadur divent get 2,50 m hirder ha 4,10 m ledander.

Gellet a ra an arvestour pourmen e-barzh ar livadur èl-se ez eus muioc'h a realism.



1. Stumm ha teknik

Teirzaolenn awenet get sternioù-aoter ar Grennamzer.

Aozidigezhioù hir (divrazoù get ar c'hreion, ur skouerenn get dourlivadur, kartoñsoù).

Teknik a tempera: a c'hell diskouez an efed treuzwelus.

2. Implij ha ster:

Stumm a-vremañ ar **v-merzherien***: ar brezel a dreuzfurm ar soudarded e merzherien.

Resis-tre eo ar munudoù.

Otto Dix, livour ar gouzañv, a ziskouez euzh ha diskiant ar brezel.

*merzherien=martired

Otto Dix (1892–1969)

-Livour alaman levezonet get an eztaolouriezh*(luskad arzl ganet en Alamagn e-penn kentañ an XXvet kantved é kas àr-raok ar soufrañs hag an trajediz).

-**E 1910**: studier e Skol an Arzoù Kaer e Dresden.

-**E 1914**: dont a ra da vout soudard en artilheri .

-**E 1915-1916**: stourmiñ a ra en emgannoù Somme, Champagne ha Rusia.

-**1915-1918**: sevel a ra ur gronologiezh ag ar brezel evit testiñ ag ar vuhez en talbenn hag ivez anduriñ an amzer hir é c’hortoz.

-**E 1920**: kelenner arzoù met koñsideret eo èl an arzour « dijeneret » get ar renad nazi.Unan ag ar re gentañ a voe jahinet ha skarzhet. Lod ag e oberennoù a vo devet get an nazied. A-benn gwareziñ e oberennoù e tle an arzour o c’huzhat.

Goude ar brezel e kemer perzh da gentañ e-barzh luskadoù arzel èl an **eztaolouriezh*** hag an **dada****. Met goude 1924 e ta da vout get ar livour Georges Grosz (1893-1959) e-penn ar luskad arzel anvet **gwirvoudelezh nevez (Nouvelle objectivité Neue Sachlichkeit)**, un emsav arzel a zo tostoc’h doc’h ar realism sokial hag a zo é vurutellat ar gevredigezh alaman.

-**Blezadoù 1920**: sevel a ra un teirzaolenn hag engravadurioù anvet « Ar Brezel » rak, emezañ, « ma faote din bout dijablet a tout-se ».

-**Blezadoù 1940**: dont a ra da vout soudard, enrolet en arme ha e stourm àr an talbenn kornôgel. Prizoniad e ta da vout e-tal Colmar en Elzas get an arme c’hall.

Eztaolouriezh: luskad arzl ganet en Alamagn e-penn kentañ an XXvet kantved é kas àr-raok ar soufrañs hag an trajediz, é ezteurel e anken bersonel. Roet eo BET lañs d’ar luskad-se get Munch ha Van Gogh a-raok 1914.

Dada: luskad arzel ha sperel krouet e 1916 . Poueziñ a ra àr an di-ster ha sevel a ra enep da sotoni ar bed drastet get ar brezel.

I. Kartenn-anv an oberenn

-Livet eo an daolenn get Otto Dix etre **1929 ha 1932**.

-Diskouezet eo BET nemet ur wech e Berlin e 1938. Koñsideret èl « dijeneret » get an nazied e voe kuzhet an oberenn e-barzh ur c’hasedad a-benn chom hep bout distrujet.

-Ur livadur eo, savet get **teknik a tempera , àr goad**.

Ar bannell e-kreiz a ra ur c’harrez 204 sm hirder, ar pannelloù kostez a ra 204 sm hirder àr 102 sm ledander.

-D’an dastumad Gemäldegalerie Neue Meister e Dresden (Alamagn) eo abaoe 1968.

--Emañ e-barzh ur labour pouezus savet get Dix: **diskuliiñ ar brezel**.

« Il me fallait cette expérience : comment quelqu'un situé juste à côté de moi pouvait tomber tout à coup et disparaître. Il me fallait l'expérimenter dans les moindres détails. Je le désirais. Je ne suis pas un pacifiste ou le suis-je ? Juste quelqu'un qui se pose des questions. Je voulais tout voir de mes yeux. Je suis un réaliste qui doit voir par lui-même pour avoir confirmation que cela se passe comme cela. Je dois expérimenter tous les abysses de la vie : c'est pour cela que je me suis engagé comme volontaire. »

Otto Dix

III. Arz ar stern-aoter.

-Un **arz relijiel** eo poegwir e vez kavet ar sternoù-aoter en ilizoù.

-Meur a lodenn e vez evit ur stern-aoter: div lodenn=divdaolenn=diptyque; **teir lodenn-teirzaolenn=triptyque**; muioc'h evit teir=liestaolenn=polyptyque).

-Ur savadur a-blom eo, alies e koad, get klinkadurioù livet pe kizellet.

-Stumm **hirgarrezek** e vez get ar stern-aoter, get dorioù a c'hell bout digor a-benn gwelet ar livadurioù diabarzh.En diaz e c'hell kaout ur bannell arall a-benn harpiñ ar lodennoù arall,anvet «une prédelle » e galleg.

-Awenet eo Dix get ur stern-aoter brudet: hani **Matthias Grünewald** (XVIvet kantved) e **Issenheim** en Elzas.

II. Teknik an tempera.


Unan ag an teknikoù kentañ implijet en arz livadur. Ganet eo e arz an Ejiptiz. Ar pal eo meskiñ pigmantoù (poultr a-dal produioù naturel krazet -èl ar lapis-lazulis, maen a liv glas)- get un danvez(melen ar vi pe peg)a-benn kaout un toaz evit liviñ.Tad-kozh an eoullivadur eo an teknik-mañ. Implijet eo bet betek an XVIvet kantved.Dibaot eo niver a arzourien a implij c'hoazh hiziv-an-deiz an teknik-se.



-Evit ar banell en diaz e voe awenet Otto Dix get ar livour Hans Holbein (livour ha engraver alaman en XVIvet kantved: « Ar C’hris marv » e , 1521. Diskouez a ra Dix e soñj diskouez ar soudard **èl un aberzh-den, ur martir.**



III. Deskriviñ an oberenn



Un askorn-korf a ziskouez get e viz ar marv hag ar sovajerezh.

Soudarded alaman é kerzhet trema an talbenn



Distro goude an emgann en talbenn: ar re c’hloazet hag ur salver(emboltred Otto Dix)



Goudor(Cagna) evit ar soudarded pe ur c’hav-bez



Goude an emgann, ur soudard chomet bev get ur maskl gaz

Un trañche get tud marv


NOZ

Un ardremmez goude ar bombezennoù

V. Kenarroud istorel, sokial , goegrafel,ekonomikel hag arzel

Etre an daou vrezel omp. Trec'het eo Alamagn goude ar Brezel-bed Kentañ.

Diasur eo stad politikel ar vro Alamagn(taol-diskar stad c'hwitet get Hitler e 1923 e Munchen, tuoù pellañ é krapaat get an naziekadur hag ar gomunism, stad ekonomikel fall get ar c'hwez-moneiz(prizioù uhel) ha freuzioù-stal en abeg d'ar Krak er Boursen e Wall Street ledanaet er bed a-bezh....).



1 Les résultats électoraux du parti nazi et le chômage entre 1928 et 1933.

4 La crise allemande et le nazisme

Ma mère nous ressassait que l'Allemagne avait perdu la guerre, bien que ses soldats aient été les plus valeureux. Une paix infamante avait causé l'écartèlement du pays. Nos parents se plaignaient sans cesse de l'appauvrissement de l'Allemagne. Ils imputaient cela aux réparations que notre pays devait payer à nos ex-ennemis.

On comptait 6 millions de chômeurs. On ne parlait pas des conséquences de la grande dépression économique. Tous nos malheurs venaient du « désastre national » de Versailles.

On entendait les adultes s'insurger contre les querelles confuses qui avaient lieu au Reichstag et on comprenait que ce désordre était dû aux partis politiques qui divisaient l'Allemagne et les Allemands.

Il me semble que ma mère lisait chaque matin dans le journal la nouvelle d'un assassinat politique. On entendait sans cesse répéter que l'une des raisons de ce triste état de choses était l'influence grandissante des juifs.

Les nazis promirent de supprimer le chômage et la misère de 6 millions d'habitants et je les crus. Je crus qu'ils réaliseraient l'union du peuple allemand.

D'après Mélita Maschmann, ancienne membre des Jeunesses hitlériennes (17 ans en 1933), *Ma jeunesse au service du nazisme*, Plon, 1967.

VI. Oberennoù arall



Otto DIX, Les joueurs de skat, 1920



Cadavre dans les barbelés. Otto DIX - 1924





OTTO
DIX

Otto DIX, Crâne, eau-forte, 1924 ©

Otto Dix « Sentinelle morte », 1924 (eau-forte).

